

Job er Glean : Joseph-Marie Le Bayon

(Pleuwigner 1876 - Kolpeu 1935)

Bet embannet e 1902. E gwenedeg.

Modernnaet eo bet an doare-skriva.

Amzer er heneu

Frañsez

Kleùet e hreer er hoed en ined e kanein
Hag int e lar dem um garein
El de' d'en neüé-hañ',
Rag p'en da er gouiañ'
Yen e kaver er galon tenerrañ.

Mari

En ined er hoed e gan eid mélein Doué
Hag eid o nehiadeu eùé
Int e lar o sonenn,
El ur vamm pe luchen¹
He hroedurig kousket er havel gwenn.

Frañsez

A ! deit enta, men dous, disul, de geneuad,
Ha me yey-me de jiboead ;
Ha ni yey un-deu
Idan er bod keneu
Aveid lared douisg un duéréieu²

Mari

O ! nepas, nen dein ket, disul, da geneuad,
D'er sul eh eer da baterad
Ha pa sono ar hloh,
Frañsez, me a yey kentoh
D'en iliz de bedein Doué aveidoh.

Frañsez

M'ho heulio, men dous, d'en overenn vintin.
Hag e-taldoh, àr men deulin,
Me 'laro me fedenn
E-pad an overenn,
Boud ma padfe peder eur hag ohpenn.

Mari

D'en ovrenn vintin, kerhet, Frañsez, kerhet ;
Mez aveidon me nen dein ket,
Rag d'er sul ema red`
Mond d'en overenn-bred

¹ luchen : luskell.

² un duéréieu on doareaou.

Aveid cheleu er predeg benniget.

Frañsez

A ! M'ho kortey, men dous ; hag, àr-lerh me merenn,
Me 'gemero me fuzulienn,
Ha ni a yey on-deu
De vale er parkeu,
Rid redeg er had ha cherrein keneu.

Mari

Nepas, kenderv Frañsez, nen dein ket d'er parkeu,
Mez, pe sono er fouspereu,
D'en iliz me yey hoah ;
Ha nen deet ket d'em hlah,
Pe en dud e grede eh oh manah.

Frañsez

Deit ahoel a-benn dein, àr-lerh er gospereu,
Ha ni e gavo hoah keneu,
Eid lanein on tanter,
Men dous, e berr amzer ;
Ha, kent en noz, e vem on-deu er gêr.

Mari

Kollein e ret, Frañsez, ho poen hag ho komzeu ;
Nen dein biskoah de glah keneu,
Ged den yaouank erbed,
Ma ne vem dimezet :
Rag er person en-des eanNn dihuennet !